

# VAR SAO, BREIZIZ !

*War don :*

Da feiz hon Tadou koz, ni paotred Breiz-Izel,  
 Ni zalc'ho mat atao :  
 'Vit feiz hon Tadou koz, hag en-dro d'he banniel,  
 Ni holl en em stardo.  
 Feiz karet hon Tadou, morse ni ho nac'ho,  
 Kentoc'h ni a varve (*ter*).

1

Keit ha ma lugerno e bolz uhel an nenvou,  
 Ar stered hag al loar hag an heol benniguet,  
 Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemennou  
 Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked.

2

Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz Izel,  
 Da floura hec'h aochon, da bokat d'e reier,  
 Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel  
 A ray d'eomp an dud fall, marc'hadourien geier.

3

Keit ha ma redo dour en hor steriou dudius  
 Ha ma kano er c'harz al labousedigou,  
 Ni 'redo kalonek war roudou santel Jesus  
 Hag a gano d'ezan hor c'haera kantigou.

4

Keit ha ma savo brug war gribenn hor menezioù  
 Ha ma tougo al lann bokedou alaouret,  
 Morse ne droimp kein da feiz karet hon Tadou :  
 Ni 'zo eus ar ouenn dud o deus pennoù kalet !

